

Demokratelezhioù ha renadoù totalitaerel:1919-1939 URSS hag Alamagn

Koupabl on:

I. Kontiñ ha displegiñ penaos e kemer ar galloud Lenin:

-Da vare ar Brezel-bed Kentañ, e 1917, e voe bet daou zispac'h kaset get ar **volcheviked** renet get Lenin. Kas a reas ur brezel diabarzh.

-Àr-lerc'h bout trec'h e krouas **Lenin URSS (Unvaniezh ar Republikoù sosialour soviedel)** e 1922 hag e lakaas e-pleustr ur renad politikel nevez: **ar renad soviedel**.

II. Kontiñ ha displegiñ stalinouriezh URSS:

-Mervel a reas Lenin e 1924 hag e renas Stalin àr URSS etre 1924 ha 1953 é sevel ur renad totalitaerel.

- **Dezverkoù ar renad soviedel:**

* **azeuliñ -den** : ar chef Stalin(ar sturier meur)

* **ur strollad politikel nemetañ**: ar strollad komunist

* un ekonomiezh sosialourel : **steuñvadur ha kolektivizadur**

* ur gevredigezh edan evezh ha **brigadennet** , kontrolet

get ar **Propaganda** ha kelc'hiet get **ar polis politikel(NKVD)**, Feulster enep da enebourien ar renad (**Goulag**, jahinerezh, muntrou) èl ar **Sponterezh Meur** a gas 750 000 den d'ar marv.

III. Kontiñ ha displegiñ donedigezh Hitler e-penn Alamagn

- Àr-lerc'h ar brezel-bed Kentañ e voe gwanaet Alamagn àr an dachenn ekonomikel ha sokial. Donet a reas da vout **ur Republik Weimar** embannet e 1919.

-A-dal 1929 e voe tizhet get an enkadenn ekonomikel kaset get Krach ar Boursen er SUA: pignat a reas an dilabour hag ar baourentez.

Tenniñ a reas splet ag an enkadenn ar strollad politikel **an tu dehoù pellañ, an NSDAP**, ar strollad nazi renet get Adolf Hitler.

-Anvet e voe Hitler **kañseller** àr-lerc'h bout trec'h en dilennadegoù er Parlamant e 1933 .

-E-penn ar vro e voe betek an droukziwezh e 1945

Deiziadoù pouezus:

1917: an dispac'h e Rusia

1924-1953: Stalin er galloud e URSS

1933-1945: Hitler e-penn Alamagn

1935: lezennoù Nuremberg



Lenin(1870-1924), Vladimir Illitch Oulianov, lesanvet Lenin, dispac'hour bolchevik a gemer ar galloud e Rusia e miz here 1917. Siniñ a ra an arsav-brezel get Alamagn e miz meurzh 1918 hag e sav diazezoù ur renad soviedel en URSS, krouet e 1922.



Joseph Stalin(1879-1953). Lesanvet e oa bet Stalin, an den dir, en abeg d'e demzpered rust. Dont a reas da vout Sekretour Meur ar strollad komunist. Sevel a ra ur renad totalitaerel é evezhiiñ ar boblañs, é spontiñ anezhi hag ivez diazezet àr azeulerezh-den.



Hitler(1889-1945). Stourm a ra en arme alaman e-pad ar Brezel pevarzek.Mezhekaet-du e oa bet get an drouziwezh. E 1919 e kemer penn strollad broadelour socialist alaman al labourerien(strollad nazi). Kinnig a ra e vennozhioù en e levr *Mein Kampf*. Galvet eo get Hindenburg e 1933 evit kemer ar garg a gañseller . Sevel a ra ur renad totalitaerel hag enepsemitegezh. Marvet eo dre emlazh e 1945.

-Sevel a reas ur renad totalitaerel diazezet àr an naziekadur hag an enepsemittegezh(**Lezennoù Nuremberg** e 1935).

-Diazezet e oa ivez ar renad àr **ar sponterezh, ar propaganda hag azeulerezh-den** Hitler.

IV. Roiñ dezverkoù pep renad totalitaerel:

		URSS edan Stalin 1924-1953		Alamagn nazi edan Hitler 1933-1945		
Dezvenkoù boutin: memes sistem politikel	renad totali- Taerel	Dikta- touriez h	Galloud e daouam nemet un den ha nemet ur strollad politikel	Stalin ha ar strollad komunist o deus an hollc'halloudoù	Hitler hag ar strollad broadelour- sosialist(nazi) o deus an hollc'halloudoù	
			Ur boblañs evezhiet ha spontet	-evezhiet e vez ar boblañ get ar polis politikel (Guepeoù, NKVD, KGB) -deportadur en c'hampoù-kreizenniñ: ar goulag(koulaked, peizanted pinvidik). -prozeziou Moskow: 1936-1938 -1937-1938: ar « Sponterezh Vras » : 800 000 den marv	Evezhiet e vez ar boblañs get ar polis politikel: Gestapo, SA (milis), SS(kevrenn wareziñ Hitler) -deportadu er c'hampoù-kreizenniñ(demokrated, komunisted, yuzevien..)	
			Frankizoù pennañ tennet	- Frankiz ar c'helaouiñ tennet (sañsur) - Frankiz disklériñ e veno tennet - Frankiz e veno tennet(n'eus nemet ur strollad politikel aotreet) - Sindikadoù difennet ha strolladoù politikel difennet	-Frankiz ar c'helaouiñ tennet (sañsur) - Frankiz disklériñ e veno tennet - Frankiz e veno tennet(n'eus nemet ur strollad politikel aotreet, hani nazi)) Sindikadoù difennet ha strolladoù politikel difennet - Aotodafe(tantiñ levrioù)	
			Brigadennet eo ar boblañs e-barzh aoadurioù	- En aoadurioù komunist: labour, dudi, skol skouer: Yaouankiz komunist	-En aoadurioù nazi: labour-, skol, dudi Skouer: yaouankiz hitlerian	
	brigad ennet	Propaganda e pep lec'h	-Azeulerezh-den: Stalin -Trec'h eo ar gomunism - Brasder URSS	-azeulerezh den : Hitler : ar Führer (ar chef) -broadelouriezh ha gouennelouriezh : dreistelezh an ouenn arian		
diforc'hioù àr en dechenn ideologel	Strollad politikel nementañ e-penn ar galloud		Strollad komunist: strollad an tu kleiz pellañ		Strollad nazi: an tu dehoù pellañ	
	Ideologiezh disheñvel (mennozhioù politikel disheñvel)		komunist: Un ekonomiezh –stad (pep tra a vez d'ar Stad komunist hag ar Stad a ziviz politikerezh ekonomikel ar vro): kolektivizadur an douaroù, broadeladur, steuñvadur hag industrializadur.		Naziekadur: ideologiezh ouenneloure(l)dreistelezh an ouenn arian (hag enepsemittegezh(skahziñ ha dsitrujiñ ar yuzevien), un ekonomiezh kontrollet get ar Stad met get embregerezhioù prevez(n'int ket d'ar Stad), un ekonomiezh aotarkiezh troet àr-zu ar brezel hag ur politikerezh emled(egor-buhezva e reter)	

Geriaoueg pouezus:

Renad totalitaer: renad politikel, nann-demokratel, get an holl c'halloudoù etre daouarn un nebeut tud a nac'h gwirioù mab-den ha pep enebiezh en abeg d'ar youl-Stad.

Komunouriezh pe komunism: sistem politikel hep perc'henniezh prevez ha renkadoù sokial.

Nakiekadur: ideologiezh totalitaerel savet get Hitler.

Renad soviedel: gouarnamant URSS get ur strollad nemetken: ar strollad komunist.

Aotarkiezh: barregezh ur Stad da vevñ hep daremprediñ an estrenvro evit he fourvezañs hag hec'h ekonomiezh.

Dezverkouù boutin: memes sistem politikel	renad totali- Taerel	Dikta- touriez h	Galloud e daouarn nemet un den ha nemet ur strollad politikel	Stalin ha ar strollad komunist o deus an hollc'halloudoù	Hitler hag ar strollad broadelour- sosialist(nazi) o deus an hollc'halloudoù
			Ur boblañs evezhiet ha spontet	-evezhiet e vez ar boblañs get ar polis politikel (Guepeoù, NKVD, KGB) -deportadur en c'hampoù-kreizenniñ: ar goulag(koulaked, peizanted pinvidik). -proseziou Moskow: 1936-1938 -1937-1938: ar « Sponterezh Vras » : 800 000 den marv	Evezhiet e vez ar boblañs get ar polis politikel: Gestapo, SA (milis), SS(kevrenn wareziñ Hitler) -deportadu er c'hampoù-kreizenniñ(demokrated, komunisted, yuzevien..)
			Frankizoù pennañ tennet	- Frankiz ar c'helaouiñ tennet (sañsur) - Frankiz disklêriiñ e veno tennet - Frankiz e veno tennet(n'eus nemet ur strollad politikel aotreet) - Sindikadoù difennet ha strolladoù politikel difennet	-Frankiz ar c'helaouiñ tennet (sañsur) - Frankiz disklêriiñ e veno tennet - Frankiz e veno tennet(n'eus nemet ur strollad politikel aotreet, hani nazi)) Sindikadoù difennet ha strolladoù politikel difennet - Aotodafe(tantiñ levrioù)
		poblañs brigad ennet	Brigadennet eo ar boblañs e-barzh aozadurioù	- En aozadurioù komunist: labour, dudi, skol skouer: Yaouankiz komunist	-En aozadurioù nazi: labour-, skol, dudi Skouer: yaouankiz hitlerian
	Propaganda e pep lec'h		-Azeulerezh-den: Stalin -Trec'h eo ar gomunism - Brasder URSS	-azeulerezh den : Hitler : ar Führer (ar chef) -broadelouriezh ha gouennelouriezh : dreistelezh an ouenn arian	
diforc'hioù àr an dachenn ideologel	Strollad politikel nementañ e-penn ar galloud		Strollad komunist: strollad an tu kleiz pellañ	Strollad nazi: an tu dehoù pellañ	
	Ideologiezh disheñvel (mennozhioù politikel disheñvel)		komunist: Un ekonomiezh –stad (pep tra a vez d'ar Stad komunist hag ar Stad a ziviz politikerezh ekonomikel ar vro): kolektivizadur an douaroù, broadeladur, steuñvadur hag industrializadur.	Naziekadur: ideologiezh ouennelourel(dreistelezh an ouenn arian) hag enepsemitagezh(skahziñ ha dsitrujiñ ar yuzevien), un ekonomiezh kontrollet get ar Stad met get embregerezhioù prevez(n'int ket d'ar Stad), un ekonomiezh aotarkiezh troet àr-zu ar brezel hag ur politikerezh emled(egor-buhezva e reter)	
©	Savet get Valeri Nicolas				